

19.



CANTIC

En henor d'an ITRON-VARIA-AR-VIC-
TOIRIOU en parous Plouriou, ac en
henor d'an ITRON-VARIA-KERANROUS
en enez Briad, patronez ar Vartolodet.

Speret santel, gouir sourceen deus an induljançou,
Sclerijenet ma speret, roet din o c'hraçou,
Evit gallout disclerian ar c'hantic a nevez
Var sujet a pardoniou : dessein a meus a ze.

Me o ped, Goerc'hes Vari, ive dam assistan,
Evit brassan gloar Doue d'allout reusissan,
Evit convinquin ar bobl dimeus o carante
En quenver ar gristenien a heuill ar wirione.

Nombr a so a chapello bars an escoptyo
Ac an lies paroujou a partout dre ar vro,
El lec'h ma man o c'hano en veneration,
Plaço a so frequentet gant cals devotion.

Test eo dimp Santes-Anna a escopty Guenet,
Ar plaç santel a Vulat, iveauz ar Goz-laudet,
Itron-Varia-Screrder ac iveauz ar Folgoat,
Sant-Matilin-Moncontour ; an oll er goar ar fad

En touès ar plaçou caret guenec'hu, Mamm Doue,
Et fell din comps a daou plaç evit crenyat ar fe :
An inin quentan gavan en parous Plouriou,
Eur lec'h nevez gonsacret d'Itron-ar-Victoiriou.

Enou a so bet fondet, dre sourci ar spastor,
Eur vreuriez admirabl ac a ra e honer :
Breuries Calon-Mari, henes eo e c'hanou,
Oll dreizi a c'hortener niver bras a c'hraçou.

Dirac a statou santel dimeus ar vreuries,
Peguement a bedennou na sav quet d'ar Woerc'hes,
En peb sul quentan ar miz, nac a dud a dired
Enou da houlen graçou vit ezomo ar bed.

Pet pec'her convertisset, pet den a vor sauve,
A pet den clan had savet dre ar pedennou-se.

Deut oll eta, c'hristenien, roet o hanoiou,
Visited oter Mari, en parous Plouriou.

Au eil plaç da visitan so bars enez Briad ;
Enou a so eur chapel leun a verito mad,
Balamour d'ar miraclo a dar brotection
A recev ar gristenien ennin en peb feçon.

Keranrous eo ar plaç-man d'ar Woerc'hes consacret,
Henoret gant Briadis, nombr a belerinet,
Pere a gav en ennin ar pes a houllennont,
Dre sicouriou ar Woerc'hes, ar vam ac a garont.

Demp oll eta, c'hristenien, demp oll da Keranrous,
A bep bro, a bep canton, iveau a bep parous ;
Demp di oll da requetin graço a zantelez,
Conversion ar vuez ac ar silvidiguez.

Me o ped, Mam a drue, tollet o taoulagad
Da gad ar belerinet a deu a galon vad
Da chapel Keranrous gant guir devotion ;
Roet de, Mam a druez, o penediction.

Deut da voelet ar veuiou so enni deposit ;
Contet ar batimancho ous e murio staguet ;
Consultet ar verdidi, en perill o buez,
So bet cant goech delivret gant ar Vam a druez.

Interrojet ar mamou en poân a vugale,
Ar re dal, ar re vousard, ar re infirm ive,
Ped goech int bet soulajet en o haflliction,
Ped goech a deussi zantet deus e frotection.

Sant Bernard a lar assur na hell jamais c'hoarvout
A teufe an den devot d'ar Woerc'hes da vancout
D'ober e silvidigues, gant ar gondition
Ma vo e beden sincer ac hep presomption.

Pedomp en particulier evit an dud a vor,
On c'herent, on mignonet e so er purgator:
Chefu enou ar voyen ac ar facilite
Da vean recompenset pad an eternite.

(Propriété de l'Editeur.)

